

Abgrall Fañch (Alc'houeder Arre) (Bodmeur 1906 – Bodmeur 1930)

Luhed ha moged, bet embannet e 1939.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Faziou kemmaduriou 'zo e-barz ar skrid orin. Reizet int bet.

Viou-koukoug a zo ivez.

Faziou 'zo aliez evid implij ar rannouigou-verb **a** hag **e**. Reizet int bet.

Taolenn

Dit, va mamm.

Krog an tan.

Tristidigez.

Karantez.

An den digalon.

Kan an alhweder.

Morgan.

D'ar Gorsedd a Vreiz-Vihan.

An amzer gollet.

Moged.

D'eur plahig koant.

Douar Arvor.

Kimiad.

Kan ar yun.

Hirvoud, Darvoud.

Bleuniou nevez.

Jabadao.

Kentel d'ar barz yaouank.

Prof.

Eur steredenn a zav...

Evid ar beorien.

Dizro.

Skeudennou.

Kan d'ar mor.

Eun tamm son da gala-goañv.

Melkoni.

War an daolvên.

Ne varvo ket.

Falz karantez.

Breiz glaharet.

Da anaon Théophile Guyomarc'h.

Va hoant ar here kamm.

Da Jean-Julien Lemordant.

Neh.

.

.

Dit, va mamm

O ! va mamm gêz, a galon laouen
Me 'garfe, dre eur Sonig flour,
Lakaad Karantez em hanouenn,
 Sklêr 'vel an dour.
Me a garfe rei dit da gomprenn
Penaoz da garan ar muia,
'Touez an teñzoriou a welen,
 Te, ar haerra !

O mamm ! va skevent a zo tizet.
Te nan out ken 'vid va frealzi,
O mamm !, re vezi-te benniget.
Karet ez out, karet e vezi.
Doue 'barz trubuillou an douar,
'N-eus c'hoantet merka memez tra
Eun tamm levenez 'kreiz ar glahar,
O ! daelou, pebez peadra !

O ! va mamm, pa lintre da lagad,
E tomme va halon meurbed,
Ha neuze 'h anavezen va eurvad,
 Va evurusted,
Pell ez out eet, o ! va mamm garet.
Mez atao da welan seder,
Pa zistroi 'teuy an evurusted
 Ganez d'ar gêr.

Peleh 'kavfen muioh a zouster,
Eged en da gichenn, va mamm ?
Peano 'n-eus kemend a hlander,
Ha da hini, ano divlamm ?
Mari, ano meulet mamm Doue,
Lavar kemend a draou iskiz,
Flamm hag askelleg 'vel eun huñvre
D'an neñv o nijal sioul ha tiz.

Ya, pell 'maom an eil ouz egile,
Mez ma'h erruom c'hoaz, n'eus forz,
Ra glevin c'hoaz e-bazr va forz,
 Trouz da droad, bemde'.

Krog an tan

Krog an tan en or halonou,
Ha savet uhel ar flamm,
Deuz ar paour beteg an aotrou,
Nan'ues greet nmed eul lamm.
War e alar, al labourer,
En e gastell ar markiz,
An artizan, ar bourhiz,
'Deus santet souden o toned, gand eur gwir fourrad avel,
Nerz an tan spontuz o redeg, e-bar hentchou Breiz-Izel.
Santet o-deus o paseal, alan devuz an tangwall,
Rag ar bobl a zo war vale, klevit anezi o yudal !

Krog an tan en or halonou,
Rohal a ra en or hreiz.
Dishual eo on armeou.
Oll war-zao, 'vid divenn Breiz !
Dreist ar menez, gand ar blennenn,
Klevit an trouz o toned.
An daouar 'gren, an treitourien,
A zo bremañ strafuillet.

Rag re Arvor, ha re Arre, 'zo o tiskenn an hentchou.
Klevit 'ta ar spont o redeg gand aon 'raog trouz o boutou !
Heñvel euz ar mor braz diroll, ar bobl a Vreiz dinasket,
'Yelo dineh ha gloriuz, gand he chadennou torret !

Krog an tan en or halonou,
Er palez 'vel el lochenn.
Dorn ouz dorn, emañ an tudou,
O sevel bremañ o fenn.
War an tan, c'hwezit heb anken,
Or breudeur 'zo war ziwall,
Breiz a zo 'vel eur bern raden,
Lezit an tan da strinkal !

Mouez ar gwad a zo o kana, ar gwaziou o vervi.
Selaouit anezi da gelenn, honnez morse ne fazi.
Or bro goz a zo dihunet, taolet he-deus he mantell,
Oll war-zao evid he divenn deuz an enebour marvel !

Krog an tan en or halonou,
War-zao paotred ha merhed !
Koz ha yaouank, peoh d'or hlemmou.
An naskou a zo devet !
An tan flamm ne vez ket lazet,
Taolit traou 'kreiz an tantad,
Pe ne vem morse dieubet.
Krog an tan ! War-zao, Breizad !

Tristidigez

Pa zeu an avel da yudal,
War lein ar meneziou,
E komañs an traou da strakal,
En goueled ar yuniou ;
Nijal 'ra al lapoused-noz,
Gand an trouz strafuillet,
Kement tra a goll ar repoz,
An oll 'zo ankeniet.

Neuze 'klever o wigourad,
Karrigell an Ankou,
Skrij ar maro, an huanad
Euz an droug-sperejou ;
Tan a vez gwelet o strinkal
War ribl ar foziou don
Hag e-touez an trubuillou fall,
'Vez klemm an Anaon.

Ar hornandon, ar bugel-noz,
'Zigor e ebatou,
Hag an teuziou, heb mui gortoz,
A lamm 'barz an dañsou...
Krog en o dorn, me 'm-eus klasket,
Va eurvad er bed-ma',
Va mestrezig koant dianket,
Bremaig e vo daou vloa'.

Kerzet am-eus en eur grena
Gand aon ha paourentez
E pevar horn euz ar vro-ma'
Da glask va harantez ;
Piou a laro din he helo' ?
A-raog ma 'mo santet, siwaz,
Yenienn ar maro ?

Karantez

Plah, me ‘gan dit a-greiz va halon,
Gand oll nerziou va ene.

Plah, me ‘gan din gand devosion
Son gaerra ar garante’.

Da vamm, gwechall, ‘gredan e oa bet krouet
Ouz relegenn on tad kenta.

Ar memez gwad a verv en on gwazied,
Memez gwad a zeu d’on ruzia.

Da galonig a zo breur¹ da va hini,
Ha breudeur c’hoaz, or sperejou.

On gouenn ivez he-deus ar memez kozni.
Heuilla ‘reom heveleb roudou.

Va zud eo da dud, da di eo va hini.

Er memez Doue ‘meum kredenn.

Memez trubuill a zeu d’on glahari,

Ar memez heol a sked war or penn.

Da zaoulagad a halv bepred va zellou,

Da vouez ken sklêr ‘zo eun dudi,

Ha blaz ker mad a zo war da vuzellou

Ma lak va re din da deuzi.

En da gened e lakan gwir va buhez,

En da zornig va eürusted.

Da zell dispar eo melezour va ene,

Plahig, plahig, kement karet.

Frealz va glahar ha plijadur va deizioù

‘Drid atao ‘barz da hoarz lirzin ;

Rag da galon zeder evel ar bleunioù

A hwez êzenn hlan ar mintin.

Plah, ya, va mouez a zao d’az meuli

Gand daerou a levenez,

Ken a gren va oll izili...

Kantik koz, bepred nevez !...

¹ breur ; galleg. Gwregel eo “kalon”, neuze “c’hoar”

An den digalon

Petra soñjas krouer an douar,
'N eur lakaad ahanon er bed ?
Pegwir am-bo anken ha glahar,
Eürusted ; plijadur ebed !
Rag va daoulagad a chom distan,
Na biken va gwad ne veruo.
Ouz netra va halon ne ra van :
Me a zo eun den beo maro.

Bugel, ne reen morse mousc'hoarz,
Sell dudiuz ouz mamm na tad.
Me 'oa e-giz eul lapouisg gars,
En ho touez, va hoarezed mad.
En eur greski, mignon na mestrez
Ne vleunias din va yaouankiz.
Me a zo savet war ar menez
Evel an dreog 'kreiz ar gwiniz !

Bremañ, va zud, deut on da fêza,
Kalz a bep tra am-eus gwelet.
Deut eo va zro dond
mêz ar bed-ma'
Heb am-eus c'hoarzet na gouelet.
Eun divroad on bet er vuhez ;
Pa vin maro, lakit warnon,
Eur roh kaled e-leh eur mên-bez,
Ma voustro stard war va halon.

Peurgas

Em halon n'eus na tomm na yen,
Bepred e vez eevl eur mên.
Doue heb morhed a fazi,
O lakaad er bed tud ken kri'.
Morse ne vez dael em lagad,
N'anavezan ket na fall na mad.
Em halon n'eus na tomm na yen,
Bepred e vez evel ar mên.

Kan an alhweder

Me a zo savet mintin mad.
Pell euz ti va mamm ha va zad.
Digoret ‘m-eus va diou askell,
Ha me nijo uhel, uhel...
Me ‘zant va gwad o vervi,
 Tirli, tirli, tirli.
Nerz a zo em izili,
 Tirli, tirli-li.
Me ‘gab va bro ha va zi.
 Tirli, tirliti !

An oabl ‘zo glaz, an heol ‘zo splann.
Moned uhelloh e rankan.
Ar gliz a zo war an dachenn,
Ha va halon ‘zo eun delenn.
‘Barz ar haerder, pell ouz ar vrud,
Emañ ar gwir - ‘mañ ar Burzud,
Kreñvoh va mouez ! Falloh ‘vid mud
An neb na gan e dud !
 Turлу, турлу-tud !

Uhelloh c’hoaz er sklêrijenn
Ma teuy ar sklêrder war va fenn !
Evel ma’z on eun Alhweder
Seul uhel e vin, seul seder.
Kana ‘rin traou tener ha flamm.
Atao war-eeun – morse tro gamm.
Koantiri, ha mousc’hoarz va mamm.
Fall – difall mez divlamm !
 Turлу, турлу-lamm !

Siwaz ! an heol ‘n-eus va dallet !
Gand ar vorenn ez on sklaset !
Ingolennet² gand ar gurun !
Ha va halon ‘zo en bruzun !
An avel noz ‘zeu d’an revi.
 Tirli, tirli, tirliti.
Kanom or bro hag on zi
 Turли, тirliti !

² Ingolennet : ? Marteze : inglod, alese « inglodenna ».

Morgan

Eul lestr o luskellad,
'Tre ar ribl hag an trêz,
Eun den 'ra e gimriad
D'e zousig mestrez.
An tonnou mor a sko,
Ar garreg a gren.
Dezañ ne vo dizro,
Hi n'e gwelo ken.

An eon 'zeu da wenna
War ar bezin glaz.
Ar wagenn da ganna
War ar reier braz.
Ar barrajou avel
A zo deredet,
Al lien 'vel eskell
A zo digoret.

Ar mor don fuloret
A ziroll bemde',
Ar plahig hlaharet
A walh he ene.
Bemdez 'teu da grial.
Ha halon mantret.
Morgan en eur grozal
Dezi 'n-eus c'hoarzet !

« Kement a gemeran
'Zo din da viken.
Gwele kaer a roan
D'am oll koantizien³ !
Ne dalv ket dit leñva,
Merhig, te 'zo foll,
Me a zalh ar brava
'Barz ar mor diroll !... »

Ar plahig, gand glahar,
A zo 'n em daolet
En dour leun a gounnar,
A vo he bered.
Kavet 'deus he fried,
Bremañ da viken.
Int o-daou unanet,
Hag o eskern gwenn !

³ koantizien : ? Marreze eur ger bet ijinet : "koantiz", ar re a zo koant.

D'ar Gorsedd a Vreiz-Vihan

Salud d'an Drouized-Veur euz Gorsedd Breiz-Vihan
Salud d'ar Varzed têt, kenvroiz a garan.
Salud d'an Oveded, d'ar bobl a Vreiz-Izel.
En heveleb karantez, deredet oll a-bell !

Ma'z on-me ar yaouanka e breuriez ar Varzed,
N'ez eo ket an enoriou em zoñj am-eus klasket.
Falvezoud a ra din beza er reñk kenta,
Pa'z eo red en em zivenn, divenn or peadra.
 Ha ma vez red deom koueza,
 Dindan taoliou marvel,
 Am-mo ar maro kaerra
 'Barz ar c'hoanta kavell.

Ma'z on-me klañv a gorv, va spered a zo yah,
Ha va halon 'zo kreñv dirag kement dispah.
Me 'houzañv pemp bloaz 'zo gwall boaniou diniver.
Dre zorn Doue em zav, me 'zo chomet seder.
 Ha karantez va bro ennon 'zo o vervi.
 Tra ma vezo he alan en alan ar Varzed,
 Me a zanto o redeg e-barz va izili,
 An nerz a ra ouzim, ar gwir pennou kaled !

Mad ! Bremañ ez on Barz... Trugarez deoh, Taldir !
Ganeoh, 'eneb ar bed, e vin feal d'ar gwir.
Trugarez vraz ivez d'am henvreudeur dispar,
Ar re⁴, war an daolvên, va hemero heb mar.
 Pa 'n-eus hentchet ahanon
 E karantez va Breiz,
 E tsikuilo va halon,
 Leal e vo va feiz.

Miz Gwengolo 1928.

⁴ Ar re : Pere, er skrid orin.

An amzer gollet

Furchal 'reom da dermen ar bloavez,
'Touez ludu or halonou,
Da glask roudou ven al levenez,
Goude an tantajou.

Peb devez 'baoe or yaouankiz,
Merket gand eur mên gwenn pe du
A vir ennom ar skeudenn iskiz,
Euz geriou laouen an didu.

Va lero gand Doue digoret
'Zo ze bajenn ugent ha tri⁵ :
Va hei en-deus kridienn gri'...
Ha pegen gwenn eo va bizied !

Da zeraou dit, paour-kêz levrig
A zo e-barz mousc'hoarz va mamm...
Siwaz ! An oll 'gerz tamm-ha-tamm.
Peleh 'out eet, c'hoaz, bugelig ?

An deliennou⁶-ze am-oa lennet
A gemenne eru galon vad.
Perag an heol 'zo eet da guzed
Dindan ar houmoul du, timad ?

Me ho kare, bleuniou, rozennou,
Lapoused, ezañsou, dudi...
Karet em-ije koantiri...
Tri bloaz warn-ugent, ha daerou !

⁵ ugent ha tri : tri-ugent, evid ar rim.

⁶ An deliennou : galleg. Ar folennou...

Moged

Selled ‘ran en-dro din, selled ‘ran a bep tu
Ha tan a vevfe c’hoaz, dindan berniou ludu ?
Kalon va henvroiz a chomfe distaget ?
Daoust ha Breiz a vag c’hoaz, tud a nerz, a spered,
Ne deuint ket, en avel,
Skampet oll e moged ?

Gwechall, pa oan-me yah, friant ha dibreder,
Em-oa kalz kenvreudeur, evidon oll seder.
Dre hent ar blijadur e kerzem dorn ouz dorn,
Hag an eil d’egile e touchem fealded,
Devet an tan er forn,
Ha savet e moged !

Gwechall, ‘vel an dour-red o vond dindan ar roh,
Va halon ‘giz eun neñv karget a zoniou kloh,
A dride birvidig en glander ar mintin,
Ha drant, eur plahig koant ‘gomze din kaer-meurbed ;
Mousc’hoarz he mouez lirzin
‘Maint⁷ semplet e moged.

Gwechall ‘m-oa tud ivez, ‘m-oa kerent, em-oa ti.
Va zud kêz dianket, va zi kouezet en pri,
A rann din va halon ; hag a sklas va eñvor,
Pa hirvoud em spered va zoñj paour ankeniet,
Va yaouankiz, orrol,
Stlabezet e moged...

Gwechall, pa oan kreduz, lagad tener ha lemm
A lakae levenez ha sklêrder war va dremm.
An evned ‘barz ar hoad a gane heb ehan.
Ha me, d’ar braventez, meur a wech ‘m-eus touet
Karantez dre va han ;
Dirannet e moged.

Bremañ, am-eus desket kerzoud heb lorch er bed.
‘Vid an dud sod ha ven, al lore ‘zo trohet.
D’ar hablu⁸, va hredit, na stlapit ket ar mên,
Ha mar grit d’an nesa hervez al lealded
N’eus c’hwerventez o ren
Na zaofe e moged !

⁷ ‘Maint : iskiz, pa vez “mousc’hoarz“ ha nompas “mousc’hoarou“.

⁸ D’ar hablu⁸ : d’an hini kablu⁸.

D'eur plahig koant

Bremaig 'soñjen, war lein ar mene',
Ober evidoh gand brug ru',
Eur boked paket gand karante',
War horre, dindan, a bep tu,
C'hwez vad an Arre.

C'hwez ar bleuniou 'barz em fronellou
Dudiuz 'n-eus komzet kenañ.
Gwechall zo deut dioustu bremañ,
Dizroet eo war va muzellou
Da bok kentañ !

Gand balan am-eus greett eur hevre
Evid delher stard va boked,
Ar skourrou ganin 'zo skoulmet,
Evel 'vid kloza war eun ene
'M-euz o zerret.

Hada 'ran lus e-touez an deliou,
Dastumet aneze mad ha piz.
Tañvaet neuze heb dispriz
Ar frouez kuzet e-kreiz ar bleuniou
Mar dint a-hiz.

O ! bleuniou koant, larit 'ta dezi
Penaoz 'roan dezi pardon :
Ar haerra plas 'zo c'hoaz eviti
Hag a vezo 'barz em halon
Tra vezo gwad ennon o vervi.

Douar Arvor

Da Daldir Jaffrennou

Huñvreou kaer a dremen en êzenn askelleg
A lak kridienn vraz e-touez bleun aour al lann.
Mirit eun tamm, m'ho ped, en alan ar garreg,
Soñj an amzer dibab a zeu Arvor d'embann.

Ra zeuio an avelaj a fre Menez Arre,
Da zihuna 'n or halon, eun esper moredet.
Ra zeuio mibien stouet eur ouenn disliou hirie,
D'en em denna 'vid echui ouz o housk kaledet.

Ar bobl en kuzulig a gont kement a draou,
Ma 'nefe d'o delhen kalz a hoant ar brug ru'
Neuze en liouiou brao, lak karantez heb gaou,
Eun emgleo ken laouen am toug merk an didu.

E-pad noz ar goañv, ar Maro spouronuz
A zeu en hentchou don hag er bodou teñvel⁹.
Da beb eñvor ivez eul lavar dudiuz,
Heb mar, gand koantiri, rank broda eur vantell.

Ar skweriou desevet 'vid klask lazikerez¹⁰,
A re hag a zaoulamm 'barz an deñvalijenn.
An noz 'ziskuill aneze d'êzennou ar gwarez¹¹,
Ha e leñvont neuze o malloz da viken !

Rimadellou spontuz a zav eur gontadenn,
D'an drez, d'ar mein a zo dre oll 'tal an hentchou.
Ar mammou-koz e-barz o spered, a gav tenn
Beb a vuhez wirion d'an oll bagad teuziou.

Peo troatad a zibun em hontadenn dispar
Ha peb lehiad ivez 'gomz euz amzer gwechall.
Mez dindan al liñsel dano, 'ma an douar,
Birvidig, gallouduz, bepred dihun ha grall¹².

Er reier leh e teu an avel da strakal
Ar hinvi 'vel lore heb aon a gred steui
'N eur ober deze, bemdez, gand deliou livet fall,
Eur gurunenn hwero mad d'ar bennaerez¹³ kri'.

Unan gand trouz ar mor¹⁴, ar Vretoned a Vreiz,

⁹ teñvel : teñval.

¹⁰ lazikerez : ? lazidigez ?

¹¹ ar gwarez : ?

¹² grall : grallig.

¹³ d'ar bennaerez : d'ar bennaourez

¹⁴ Unan gand trouz ar mor : Unanet gand trouz ar mor.

A zant o skoi bepred, nerzuz, o halonou.
En kement ene kelt, 'kreiz burzudou a-leiz,
Euz Barzaz an Huñvre 'hellfer gwel'd ar goulou !

Kimiad

Te n'az-peus-te eur galon gri'
Tener a-walh ez out, me 'gred.
Da lagad sklêr morse 'fazi
Ha noazoud din,te ne ri ket.
Karantez 'm-eus 'vidout, dispar,
Mez spered diêz 'm-eus da ren,
Nebeud a dra 'ra din glahar
Ha nebeutoh c'hoaz kalz anken.

Kement 'm-eus greet, ma 'm-eus tizet
Da galonig seder ha flamm ;
Pa zoñjen mad ez on estlamm,
Ha diflamm biken ne vin ket.
Ne vin diflamm ken am-mo bet
Da bardon goude da gounnar.
N'eus forz a rin, n'eus forz lavar
Ma vin c'hoaz eüruz war ar bed.

Va frealz er bed, va eurvad
A zo ennout, mestrezig koant.
En donder da zaoulagad,
Donder a gresk va nehamant !
Va frealz er bed ha va joa
Eo da gened, da yaouankiz ;
Beva hepte zo eur gwall dra
Bremañ eh ouzon mad o friz.

Kan ar yun

Da Florian Le Roy

An haleg a bleg
O skourr ken dicheg
War ribl ar ster ;
An avel a wash
Ha netra ne glask
Euz kêr da gêr.

E-barz ar poullou,
'Touez ar brugou,
Ar re zaonet !
Ne dalv pedennou
Euz ar Berejou,
Tud koñjuret.

Eneou o termel¹⁵,
Eneou o vervel.
Ha 'vid petra ?
'N Anaon a fai,
Ha darn a gri,
Ivern ! Netra !

Evel an ivern,
Ar waremm a vern
Kalz a dud foll.
Neuze e tispenn
An drista bedenn
Euz pobl ar Goll¹⁶ !

An dristidigez
A zeu gwall enkreuz
E-kreiz ar yun.
Morse levenez,
Biken karantez,
Eno 'tibun.

En noz leun a froug
An êzennou droug
A lemm o dent.
O han a zivev,
A zarah ar blev,
'Lak an den lent !

Va halon ne gar,

¹⁵ termel : termal.

¹⁶ ar Goll : ? . Marteze ar Holl.

Va spered ne oar,
'Velkent bennoz.
Daoust ha 'm-on kabluz
'N em gavan kreduz
Bemdez, bemnoz !

Hirvoud, Darvoud

*D'am henderv
Jean Bothorel.*

Da lakaad freuz ha reuz,
War an tamm douar-mañ,
Siwaz zo meur a veuz !...
Ne gavin ket va heuz,
Bremañ.

Ar barz 'vel an evned,
A gas e ganiri,
Laouen hag ankeniet,
Dineh pe gwall vehier...
Kanaouenn ne fazi,
Kalon vantret.

Ar mousc'hoarz a zo bleun
Demeuz ar garantez,
Hadit, hadit ar greun...
Medit, pe ho-po keun.
War muzell ho mestrez,
Levenez... leun !

Melezour ar halonou,
Ar vouez 'deu da ziroll,
Ne guzo ket an daelou,
Koumoul ha kañv an neñvou,
Gallouduz war an oll,
Huanadou.

Huñvre 'm-eus ouz an amzer,
Pa reden diarhen,
Seder 'vel an alhweder
'Tridal 'urz d'an ervenn.

Huñvre 'm-eus ouz va yaouankiz,
Tremenet ken sioul, hag iskiz,
Pa nijen ouz bod d'ar bleuniou,
Dre zor digor ar halonou !

Eñvor am-eus euz ar menez,
Leh e klasken neziou nevez,
Leh kalz re all a gutuillo,
Al lus dous ha c'hwero !
Eñvor am-eus ouz eur vouez flour
A ouestle din da virviken,
Karantez redet gand an dour.

C'hwez ar rozenn gand an avel,
Soñj am-eus mad euz he dudi,
Nijet en moged 'mêz va zi,
An nor zerret, an oabl teñvel¹⁷,
Lener¹⁸, kurun, anken ha pri.
Mond a ra an traou disheñvel.
Ar mad d'ar fall, ar fall d'ar gwell !
Daelou, adelou, barrajou kri',
Skeud ar maro 'uz d'am havell !

Da lakaad freuz ha reuz
War an tamm douar-mañ,
Siwaz zo meur a veuz !...
Ne gavin ket va heuz,
Bremañ.

¹⁸ Lener : ?

Bleuniou nevez

Falz Vreudeur, echu 'peus d'ober lez *d'ho mestrou* ?
A-berz peseurt reolenn 'nahit *or frankizou* ?
Ne ganit ket an heol ma 'peus aon 'raog ar glao,
An neb a zo dinerz a skoach rag bahado'.

Kement hini a bleg heb heug na poan galon,
'N-eus kalon eun treitour hag ene eur falhon¹⁹.
Ma 'mañ c'hoaz c'hwez al lann en didu ho fronell,
Ho teod a vo flemmuz, hag ho torn digetell²⁰ !

Pilpouserien disliou, eur wech leskit ho trouz.
D'an traoñ ho soñjou fall hag ho tokou voulouz...
An neb 'zo gwir Vreizad oute 'n-eus ezomm mann.
Ar pezh na lavar ket, ar ouenn 'deu d'hen embann.

Perag ober lazig da baotred ar Hannad ?
Dirag eur werenn leun ez int renerien vad.
Être eo dond a-benn ouz an dud rann ha rann...
'N eru frea 'neze, me 'gred, gand eur hoz bodig lann !

Ya, Breiziz douetig, hep poueza war ar skourr,
'Wechou, an den tizet a skeud an torfetour !
Mevelien, mar kirit ! Lakizien n'eo ket dao !
Kerkoulz ha "Breiz bepred" e kavan "Breiz atao !"

¹⁹ falhon : falhun

²⁰ digetell : ?

Jabadao

Laouenan,
Laouen a gan,
Ro din da ganaouenn,
Ma teho buan
 Va foan,
Didrouz gand an êzenn.

Me 'gar an heol, an neñvou,
Hag ar soniou lirzin,
Lagad ar merhedigou,
Hag o dornig mibin.

Evel-se e kanom-ni,
Anken hag evurusted,
'Tre daerou ha kaniri
Ar vuhez 'zo mesket.

Kentel d'ar barz yaouank

Na ganez morse war da deleñn
Enor d'ar gwad, d'an emgannou ;
Na verkez morse war da daolenn
Lorh an Arme, ar Brezeliou ;
Kan kentoh an amzer da zoned
Eur vuhez kaer meurbed skeduz
'Vid ma laro ar bobl estonet :
Ar Peoh 'zo eun dra vurzuduz.

Merk bepred en nerz da ganaouenn
An uhelder sakr euz ar Gwir ;
Kan kaloneg, ha a vouez loouen
Eur zonig flour gand anal hir.
Ya, kan ar gened, ar vraventez,
Kan an Douar hag ar Furnez,
Ar merhed koant, ar bleuniou nevez,
An Neñv, an Heol, ar Garantez.

'N em lak a-bez da zervij ar Vad,
An onestiz hag ar re baour ;
Na stagez morse da zaoulagad
War yeo ar madou nag an aour.
En peb leh, diskuill al loustoni,
Sao da gounnar ouz ar re fall,
Ha fre dre-oll an oll sotoni.
Bez atao den eeun ha leal.

Ra vezi enebour d'ar Gevier,
Gra sell lorheg ouz ar Gloruz ;
Mez na zonez morse da gleier ;
Ro skoazell d'ar re falleüruz.
Barz, te a rey skwer d'an oll skweriou
Brezel d'ar beh, beh d'ar brezel,
D'ar Peoh, d'ar Vad, kan meuleudiou,
Da galon greñv, da benn uhel.

Da lagad war an traou da zoned,
Sell an Aroakaad skeduz ;
Evid ma heuillo ar Vretoned
Roudou da gammejou kreduz.
Ma tiehana ar broiou taerra
An eil d'eben d'ober brezel,
'Vid na zeuio ken gwad da vera.
Barz, treh d'ar ganiri varvel.

Malloz d'an Droug ha d'an droug-komzou !
Malloz da'n neb a hwez an tan,
D'ar pinvidig a hronn e vadou.

Da biou bennag a zo distan !
Mez d'an dud yen ha d'ar re glouar,
A gemenn ar fall, an drubuill,
Heb 'n em zével oute gand kounnar,
Hep kaoud ar galon d'o diskuill !

Peoh war ar bed d'al Labourerien,
Peoh deze bepred war aouar ;
Ma vo an dud gwir amezeien,
Ma teho ahann ar glahar ;
Kan, o ! Barzig kêz, war da delenn,
D'an dud paour levez ar bed.
Ha merk sklêr a-hed da ganaouenn
Esper an Amzer-da-zoned.

D'an 21 a viz Gouere 1929.

Prof

D'ar Barz Koz Charlez Rolland, a Werliskin.

Nann, va mouez n'eo ket lirzin,
Nann, va mouez nan eo ket lirzin
Ne hadfe ket pell.
Salv-ho-kras, an êr 'zo sklintin,
En Kerne Uhel...
Evel-se me 'gred e klevfet,
Hekleo an tamm son,
En enor deoh am-eus savet,
War ar haerra ton !

Dudiuz meurbed e kavan
Ho kalon vreizad.
Gras deoh-c'hwi muioh e laran
Kavell va hendad.
Ya, bremañ 'm-eus anaoudegez...
Kaerder ar menez,
Douster birvidig va mestrez,
Yez ar garantez !..

Ho soniou evel ar sklêrder
A lintr em halon.
Ar hlañvour a zo deut seder,
O ! barz koz gwirion !
An neb a gar e vro zantel
Ne vo morse paour.
Peurbaduz, eneo Breiz-Izel.
Ray deoh ar *Gouriz Aour*.

Stard 'n ho sav, c'hwi ho-peus dalhet
'Giz eur gourener,
Brud ha lorch langach ar Gelted.
Herr ar gouennou taer.
Deoh divennour or peadra,
Gedour an douar,
Enor deoh evel d'ar brasa
Telenner diispar !

Yaouankiz, taolom on tokou.
Ha c'hwi, pennou skañv,
Lakit mad en ho sperejou,
Ano an den-mañ !
Meulom oll, ni poblou a Vreiz,
Rolland ar barz mad.
A-galon degasom a-leiz,
Koad yah d'an Tantad !

Eur steredenn a zav...

Da Léon Ar Berr (Ab Alor)

Eur steredenn a zav uhel en Neñvou glaz,
Gedourez a garantez war bihan 'vel war braz.
He lagadig ken tener a lugern gwasoh-gwaz.
Eur steredenn a zav uhel en Neñvou glaz.

E-pad sioulder an noz e-tal ar firmamant,
E kemenn deom Doue o tiwall or renoz,
A gemenn esperañs d'an hini a hortoz...
Eur steredenn a zav splann evel an arhant.

Rouanezig ar peoh, 'vel gwechall en Bethleem,
Diskennit ho trugarez en peb leh a zo klemm,
Diskarit an trubuilhou, 'tre an dud a zo kemm.
Rouanezig ar peoh, 'vel gwechall en Bethleem.

Roit fiziañs da'n den-mañ ha sklêrijenn d'e vall²¹
Ha truez d'ar paour-kêz, karantez d'an den kri',
Madelez, levenez, ivez da bep hini
Roit o goulenn d'an oll, ma ne vo ken tamall.

Peb den e-barz e galon a zoug eur steredenn,
Pe a vez aour pe arhant, droug-livet pe melen.
Diwallit mad d'he laza, pe malloz war ho penn,
Pe e vez aour pe arhant, drouglivet pe melen.

Nann, na vougit ket ennoh mouez ar vad hag ar gwir.
Na zeuit morse da vantra ho feiz hag ho fiziañs.
N'esu ket a zilvidigez e-mêz ar gosutiañs
Hep steredenn er bed-mañ, ar vuhez 'zo re hir.

Gwall deuh e vo d'an hini na heuill e steredenn.
Kuzet en oabl e galon gand meur a houlaouenn.
Ha warnañ teñvalijenn an noz 'deu da ziskenn
Gwall deuh e vo d'an hini na heuill e steredenn.

Ha malloz war an hini a ya en hentchou don,
Hep sklêrder, hep goulou, hep sikour, hep skoazell,
Ma ne zeu ket a stered en neñvou glaz uhel,
Rag enkrezoù didrez a zeuio d'e spouron.

Eur steredenn a zav uhel en Neñvou glaz,
A vezo da virviken, a zo bet a-viskoaz ;
Tra ma vezo daou zen beo war an douar braz,

²¹ vall : ? "fall"

Eur steredenn a zavo uhel en Neñvou glaz.

Tra ma vo ar steredenn e-kreiz ar firmamant,
O skedi ken laouen ha dous 'vel eur bennoz,
'Vo roet huñvreou kaer da gement a repoz,
Lugernit 'ta, steredenn, o ! steredennig koant !

Evid ar beorien

D'am mignon Y. Rolland, Skolaer.

Daougrommet war e benn-baz dero,
Ar hlasker boued 'hed an hentchou,
A zant e zah leun a draou c'houero,
Naon du bemdez, aon a-wechou.
Ken lent e vez 'raog an archerien,
Ma wel o skeud e-barz pep korn.
'Vid an urz vad eo greet al Lezenn.
Divennet eo astenn an dorn.

Pa dremen er hêriou, a-boan
Ma houlen eun tamm krenn bara.
Eul lonkad dour da ziskenn koan.
Er hoad e kousko peurvuia.
Ar chas 'n eur stenna krenn o chadenn
A razaill war ar paour-kêz koz.
An aotrounez, o hov diroufenn,
Gand eur sell fall, hen kas er foz !

Hir eo an deiz ha braz ar blenenn,
D'an neb en-deus naon ha sehed.
Da gov goullou pounner ar chadenn,
Deuz ar zav-heol tre d'ar stered.
Truez outañ ? Mez an ospital
Nan eo ket savet 'vid ar chas.
Gwelloh e kav c'hoaz chom da redal²².
Ar heveleg a zant al las.

Daougrommet war e benn-baz dero,
Ar hlasker boued 'hed an hentchou,
Azreb ar mouar hag ar hraoñ fao.
A dremen maon 'biou d'ar skoliou.
Anavezoud 'ra ar zon a gan,
An avel 'bazz ar hoajou don.
Ankounac'haad a ra e baon,
O repren eun tamm war an ton.

Eun devez e ene zilammo,
Ouz e glor 'barz an êr klintin,
Hag a lavaro sur kenavo,
D'ar bed fallagr hag heb ijin.
E-barz an draonienn, ar hornandon,
A davo neuze e Sabat,
'Hga a lavro, 'giz orezon :
« Ar hlasker boued 'oa eur paotr mad. »

²² redal : redeg.

Va zud vad, am'z eo leun ho yalh,
D'ar paour-kêz koz, war an hent braz,
Digorit anezi frank a-walh,
Evid ma tebro bara c'hoaz.
Kemerit truez ouz e vizer.
Dibrennit dezañ dor ho ti.
Grit aluzenn a galon zeder.
Trugarekaet 'vezoh eviti.

Dizro

D'eur genvroadez vrudet

Desket 'm-oa dit toniou ha soniou lirzin,
Deut deom end-eeun gand on tud-koz.
Ha pa gleven neuze da vouezig sklinton,
O kana 'neze, 'vezen er baradoz.
Kaoud a ree din az-poa touet fealded
Da beadra poblou taer ar mene'
Ha padal deh, memez e oant oll nahet,
Da wad, da di,da vamm ha da ene !

Ya, dalh bremañ ar prof ouz da ganiri
D'ar bobl lorhuz a gavez deuz da hiz.
Na deuez ket gloriuz gand da goantiri,
Da rodellad en or bro ken iskiz.
Bremañ te ray lazig d'ar re a giri,
Ha fae warnom – da vreudeur – koz Vreiziz.
Gwir eo an hent a zo frank da bep hini.
O ! plahig kêz, diwall mad ouz Pariz

Rag kalz a re all am-eus bet gwel't touellet
Hag eun devez stlapet en kreiz ar pri/
Pa vanko dit da vouez sklêr ha da gened,
Gra da zoñj mad az-po 'ziwar da fri.
Ma reustl da droad e torri da gammejou,
Hag eur gwall lamm deuz uhel a dapi.
Mez diwevad e teuan war da dreujou...
Na ri tamm forz memez deuz va ali.

'Peus ket eñvor, Breizadez ven ha penn skañv,
Deuz da lignez ha deuz or yaouankiz ?
Pa'maout hirio, 'vel al lapoused goañv,
Tebet skoelfeg, hep selled war da giz...
Pe pa ganont,daouste 'kreiz ar strakadeg.
Ne glevez ket, dre oll, er meuleudi,
Eur henvroad kendalhuz d'e vrezonég,
O rebech dit, plahig, da falloni ?

Ober 'ra fall neb 'ra goap gand fallentez
Deuz ar havell en-deus e luskellet.
Ne ran folet ouz lorh nag ouz braventez,
Pa ne zalher d'an ti leh 'oar savet.
Goud a ran mad ; biken te ne bardoni
Ar homzou-mañ, skrivet stard hep kounnar.
Ha warnon-me, da valloz sur a zalhi,
Keit ha vin beo... ha te war an douar.

Eur gwall doare am-eus kemeret bremañ,

Ma rankan dit, displega penn-da-benn,
Drast va halon hag ar pezh a bouez warnañ²³,
Kaz ha tan-flamm, pa lavarinn a-grenn.
Droug 'h a ennon pa welan koz rampenned²⁴,
O rei an urz deom-ni, oll gwir Vreiziz,
Ha gand arhant ha boulouz a bemp lehed
'Hont da gemer gizioù sod da Bariz !...

Ma teuez c'hoaz en bro ar billaouerien,
Gand da zillad paeet gand millurioù,
Daoust ha ne vo ket dao d'an oll gouerien,
Lipad ar pri 'vid espern da voutou ?
Gwir eo te 'peus bremañ eur wetur-dre-dan,
Eur hastell kaer savet ar ribl ar mor,
Lakizien vraz a beb liou, ha re vihan,
Eun arme greñv o kana dit enor.

'M-esu ket avi ouzout, med kalz melkoni
Ouz da weled, kenvroadezig ker ;
O vond dallet da leh e nij ar brini
Ma kendalhez da ren eur seurt buhez !
Deus war da giz, hag an oll az kemero
'Vel eur bugel karet da dianket.
O ! plahig koant, adarre te a gano
Ar sonioù koz, gwechall e-poa desket !

²³ : warni (ar galon)

²⁴ rampenned : ?

Skeudennou

*D'am mignon, an doktor Charles Cottonnec,
drouiz "Pareour" euz Kemperle.*

Pareour, eun devez, pa deufoh en va bro,
Leh nan eus nemed menez ha yuniou, tro-war-dro,
Pa zirollfe an avel da stourm, kriz, fall ha yud,
Pa renfe 'barz ar hounoul, soñjou c'hwero ha pud,
Daoust ha c'hwi 'hellfe ivez lakaad d'ar barr dirud²⁵,
Eun harz tener med kreñv, 'vel reun al loened mud,
Gouest da vired da euzi, kreiz sebeliou an dud ?

Hag ar bloaveziou stlejet a-hed an amzeriou,
Deuz kantved da gantved evel reuzeudiou,
Amañ 'barz an draonienn ken drouglivet ha kleuz
E tastum ar baourentez, an enkreiz hag ar heuz.
'Giz eur pehed marvel, kuzet don en or hreiz,
Al lorh teñval morgousket a skoach e-barz e niz
Ha mezuz or houstiañs hirio a vo direiz,
A voustro war an techou, rollet war naon ar bleiz !

Pareour, rag da stoui war ar vizer oh boaz,
Amañ, oll reuz ar bed a zo dispah, en noaz.
Gouliou ar paour-kêz den, pebret gand fallentez,
A zo sallet ivez gand poan, glahar ha mez.
Ma ! gwdelit, pll, an douar, trist 'vel dremm eur barner
En neñvou hep trugarez, oablet treud gand krizder,
Hirvoudou poblou brein a zisalan gand flêr,
Leh e rigogn ar maro ha teuziou diniver.

Kalon an den 'zo ledet, dizamant war an dour.
Er poull, an halegou morz a gren hag a wigour.
Eur vouez sklaset a hrozmol ; diston 'vel eur rebech.
Daelou a hleb ar gouzer, daoust m'eo seh o bech²⁶.
Daoust ha *pare* zo amañ d'an trubuillou mantruz ?
Doue, kuzit, me ho ped, eru skeudenn ken skrijuz,
Ma'h astennim on daouarn d'an heol krantezuz,
A roy deom gand e dommder, eun esper lugernuz !

²⁵ dirud : ?

²⁶ bech ; ?

Kan d'ar mor

D'am mignon Léopold Pascal.

An noz-mañ am-eus kousket, dindan trouz ar mor braz...
Hag an tonnou ken dicheg war ar garreg peurnoaz
O-deus douget ha bleinet nijadenn va huñvre,
Dianket deh eun tammig deuz hentchou ar meen'.

Diskan

Roll, diroll, o ! mor dizurz,
Dour spontuz ha garo,
Leun a zroug hg a gounnar,
'Ruill da gorgvou maro.

An êzenmik kounnaret a hwez war an aodou,
Blaz an holen hag alan an douriou heb mestrou.
Avel gwalarn pa fulor, wae vein gwalhet an trêz
A fre lann glaz ar hleuniou heb damant na truez.

Dirazout kement anken, 'vez dioustu mantret krenn,
Ha peb glahar sebezet a rank stoui he fenn.
Piou a deufe da bleidi ne n'out²⁷ ket eun ene
Birvidig 'vel on hini, ha disheñvel bemde' ?

Ma vousc'hoarzez a-wechou ez eo 'vid ober goap
Rag da douelli an dud az-peus doare dibab.
Dindan an neñvou euzet hag al loar sarahet ?
Penaoz 'hellez, muntrevez, golo mad da dorfet ?

War da vronn garantezuz e halvez gand mouez flour
Ha da vouskan luskelluz 'zeseo ar psketour :
E-giz eur hast e tommder en em roez d'an oll
Ha pokou da vuzellou bepred a gas da goll !

Perag e-barz da weled 'vid ar briedelez
E tiskenn al liñser-gañv war daol an dud nevez ?
Perag e-leh entana, 'teuez da sklasa ar gwad ?
Perag ivez 'z eo dit-te koantiz kement Breizad ?

Rag ni oll, en or zelloun on-eus skeudenn ar mor,
Huñvre skeduz ar sklêrder, barzoniez Arvor !
Ha setu-eñ da viken, despét da gement tra,
Daoust ha ma troh ar vuhez, mestrez euz ar gwella !...

²⁷ ne n'out : n'ez out

Eun tamm son da gala-goañv

I

An deliou a gren gand anken
Er gwez da gala-goañv
Hag o liou eom a hourhemenn
Ez int revidig ha klañv.
An avalou a zo aviet
‘Barz al liorzo’.
An ilin-moh²⁸, prestig gwentet,
Er harz a vreino.

II

Ar mouar sebeliet bremañ,
Er hinvi louz ha glebiet
A restaol o gwad warnezañ,
D’an douar, ma vo sunet.
Ar barr a bil gand farserez,
Druillajou kraoñ fao.
Hag an drask bepred war evez,
Prim o diblusko.

III

‘Pad an noz, an eneou daonet,
Dinasket ‘vid ober reuz,
A zeu er fourrad diroudet,
Heb gelloud prena o heuz.
An hoper a youh er reier,
D’an teuziou diroll.
Hag al loened en o hreier,
A zach war o roll.

IV

Ha goude koan, ar mammou-koz,
A zihuno gand o neud
Kontadennou kaer a-brepos ,
Evid an oll baotred reud...
An tan mouded war an oaled,
A hoarz ken lirzin
Ma sant an tad-koz dihunet,
Ar flamm en e hlin.

V

En despet d’an amzeriou fall,
Ha da gement kaouad kri’,
Ar re yaouank ‘red da leh all,
Rag o gwad ‘zo o vervi.
Ar galon deus med eur mare,

²⁸ An ilin-moh : ?

Keit ha sko kaled
Red eo klask dezi dizale,
Plah... ma vo paret.

VI

N'eus ket ken ambleudadegou,
Dindan lagad ar stered.
D'an dañsou nevez gand begou,
A ziroll an oll verhed...
Son ar binou, ra vo gwelet
O chom stard atao.
En Kerne a zo²⁹ c'hoaz paotred
'Vid ar jabadao.

VII

Bombard, dispak eun ton buan,
Ma 'yelo ar helh en-dro.
Dorn ouz dorn, kanom an diskan,
Hardi 'ta ! Flemmom d'on tro.
Stokom ar seuliou war al leur
Ha youhom deoh oll
Yehed paduz ha gwir vadeur³⁰ !
Ar furnez 'zo foll !

²⁹ a zo : ez eus.

³⁰ vadeur : ? Marteze "mader" = madelez.

Melkoni

Gand va hinnig kaloneg d'ar barz Gwaz Eusa (Pierre Mocaer).

An huñvre dismantret, ha muntret gand peb den,
D'abardaez e vuhez, pa zellfe war e giz,
'Wechou, dre eun eñvor, a gas d'ar heuz, a-blen,
Eun ene oll karget gand eur haerder iskiz.

Hag en oabl an nozvez, lintret gand ar stered,
E sao, 'vel eur bennoz, douster ar sklêrijenn,
Ma ra an daolenn zakr d'on haranteziou bet,
'Leh ano ar Gened 'vo skrivet da viken !

D'an oad-se, 'heller mad, muzualia c'hwek an hent,
Ha lorh ar geriou ven stlapet d'an avelioui,
Pa deu ar zotoni da dehed, d'an ampoent.

Doue ! nag e karfed 'n em gaoud bugaligou,
En eru horv kastizet, 'leh ar galon 'zo glan,
Mousc'hoarzig an neñv glaz ha tommder an heol splann..

War an daolvên

A-boan war an daolvên, 'oa laret : « Peoh a zo ! »
Ma welan etrezom, ar reuz o tond en-dro.
Ha perag 'n em zrailla ? da betar se a dal',
Rag n'eus forz deom pe hent, ma'h erruom er pal,
Breiz atao, Brezi bepred, pe Breiz da virviken,
Ouz al labour ken sakr ma teuom oll a-benn !
Pep hini 'zo dleour d'ar Vro, d'ar ouenn, d'ar Gwad.
Ha 'vid salvi aneze, e poanio gand kalz stad.
Yaouankiz, va breudeur leun a dan hag a flemm,
'Vid ma treho hirio ar gwir Gan war ar hlemm.
Dirag memez tantad na rit ket ho penn-fall
Ma tostaio an deiz a zeportom gand mall...
Gwelit, an eost 'zo azo war leur zorna Kerne !
Ha peogwir e vervom er memez karantez',
Ar re a ved an ed a dle kaoued doujañs
'Vid ar re all o-deus hen hadet da gomañs.
Va zud, koz ha yaouank, ma'h ay bara er forn.
Dem kalon ouz kalon, ha kerzom dorn ouz dorn.
Evidi ma vo or Bro, da viken, braz ha reiz,
Breiziz oll en or zao, youhom buhez da Vreiz !

Ne varvo ket

D'an doktor A. Classe, evid beza roet din e-pad pemp bloaz sikour soursiuz eur medisin mad ha dorn eur mignon kaloneg.

Ne varvo ket gouenn ar Vretoned
A roio c'hoaz kalz a dud vad
A viro en amzer da zoned,
Brud al lignez, enor ar gwad.
Dalhom bepred da yez on tadou.
Stagom d'ar vro 'deus on maget.
'Vel an dero don en douarou,
Gwriziennom 'ta, pennou kaled !

Adarre an nevez amzer
A hoarz en traoniennou Kerne.
En oabl ken glaz an Alhweder
A gan kened ha bravente'.
An avel deuz Roh Trevezel
'Touez al lannou a vouskan
Ma friz karantez Breiz-Izel
Dre ar brugou hag ar balan.

Ne varvo ket en or halonou
Eñvor an amzer dremenet.
Yudal a ra c'hoaz an hirvoudou
Ha soñj ar poblou bet trehet.
Lezom peb den da gerzoud e hent
Hep trubuill, heb aon na souez.
Mez eun devez diskignom on dent
Ma teuer da noazoud d'on yez !

Selaouit 'ta mouez ar hleier
Hentchet sioul gand ar goumoulenn,
Leun a spi, karget a zouster,
Seder, dudiuz ha laouen.
An den paour a-hed e vuhez
Ne houlenn ket kalzig a dra.
Eun tamm yehed ha karantez
Eur galonig, eun tamm bara !

Ne varvo ket war douarou Breiz,
Ar hiziou koz hag ar furnez.
Ha divennom gand kalon ha reiz
On her³¹ ouz an doare nevez.
Or peadra 'zo war ar garreg :
Eun ti, eul liorz, hag eur hraou...
Dalhom d'or bro 'vel Breiziz gouizieg

³¹ her : herez.

Ha mirom anezi dond en gaou.

Ne glevit-hu ket ar biniou
O son e-tal ar perzier kloz ?
Ha ne welit-hu ket ar bleuniou
O varella girzier ar roz ?
Ha ne welit ket koefou gwenn
Oh ebati war al leur vraz ?
Ne glevit-hu ket an abadenn...
Youh ! tro d'an dro ! Breiziz 'zo c'hoaz !

Ne varvo ket gouenn ar Vretoined
Rag ar baotred a denn *d'o mamm*.
Beza 'vo en amzer da zoned
Kalz mibien fur d'eur vro divlamm.
Komzom, Breiziz, gwir yez on tadou.
An urz 'zo roet gand an Neñv.
Dalhom d'on gizioù, d'on dillajou.
Touom chom oll feal ha kreñv.

Adarre an nevez amzer
A laka ar gwad da vervi,
Peb lapous a zeu telenner
Evel pep trouz eur ganiri ;
Barzaz a zo e-barz pep kalon.
Ha mousc'hoarz war ar muzellou,
El levez, ni chom Breton,
Peoh war bed d'an oll boblou !

Falz karantez

Dirag ar Werhez sakr ha sant Yann-Badezour
He-doa touet dezañ gand he mouezig ken flour,
 Karantez peurbaduz !
Hag a-boan war al le, e varve ar geriou
Pa zavas he halon 'eneb he muzellou,
 Ar gaou euzuz !

Touet he-doa dezañ, penaoz biken eun all,
Ne lakje he ene da zoned da dridal,
 Keit ha vije er bed !
Ha dioustu war al leh – fae war ar wirionez,
Didan he malvenn hir, a-guz, an dreitourez,
 Eur falzentez dibred !

Touet he-doa dezañ, tre da veteg mervel,
He horvig mistr ha meür, prof d'ar giz broadel,
 Dre ar briedelez !
Ha neuze, tremenet flamm an tantadig ven,
Torret ar vaz-valan ha dilezet an den.
 Foei d'an drubarderez !

Dirag ar Werhez sakr ha sant Yann-Badezour,
War he daoulin pleget, gand he mouezig ken flour,
 D'he halonig mignon,
Anzavas dre eul le, ar feiz en he homzou,
Ar c'hweka karantez a hellfe an neñvou,
 Benniga hep sermon !

Ne oar ket 'vid petra ha ne oar perag
He-deus greet kement-se, en eun taol krenn, a dag.
 Rag leal 'oa a-raog !
Ha soñjal a ree hen karoud stard, avad,
D'an unanvieg red, 'n em roje gand gwir stad,
 Med an trubuill 'zo rog !

Touellet he-unan, a-berz an droug-spered,
Gwall skwer da bep hini ha d'an ivern gouestlet,
 'Balamour d'an tech koz !
Daoust hag ar gaou ganet en kalonig Eva,
Dre an herez diaouleg a zo da wrizienna,
 Dindan reveulzi an noz ?

Med pegwir 'zo urz vad, der gemenn ar Salver,
E vezo pouezet piz, - aotread ar barner –
 Gand eur hrog³² dizamant
Lod an droug hag ar gwall, da beb den tamallet,

³² eur hrog : notenn gand an oberour : eur hrog-pouezer.

'Eneb talvoudegez ar vad greet ha rannet,
Bezom heb nehamant !

Dirag ar Werhez sakr ha Sant Yann-Badezour
He-deus touet a galon ha nahet a vouez flour

'Vdel en despet dezi !

Ha da biou gand an droulañs – d'ar genou pe d'ar gwad ?

D'ar plah pe d'al lignez ? – d'ar bugel pe d'an tad ?

Da biou ar falzoni ?

Breiz glaharet

D'ar gwir varz Théophile Guyomarc'h

« *Me a fell din 'vefe va han digabestr evel ar heveleg a darnij war ar yun, e-nefe va han 'vid lezenn 'med plijadur va spered ha va zoñj, hag evid ton, nemed trouz va halon virvidig.* »

Glahar 'zo em halon o toned en va bro.
O weled an deliou e traoñ ar gwez dero.
O weled er parkou an oll drez o redal³³,
O klevoud dre ar vro avel fall o yudal.

Koulskoude en va bro a zo³⁴ memez douar,
En va bro sarahet gand poan ha gand kounnar,
Eler, binviachou, ledet dre an erven
A ra d'on izili krena gand an anken.

N'eus den war ar bale na den o labourad,
Ne welan den er park na den ivez er prad,
Er waremm ne glevan ar mesaer o youhal
Dañvad o veglad nag an oan o vreunial³⁵.

Va haer gêz, 'oa gwechall ken iskiz ha laouen
A zo prestig bremañ da goueza en poultrenn.
Ranna 'ra va halon, Doue, planeden gri' !
Va daerou 'deus ruillet o tegouezoud em zi !

Penaoz 'm-eus anavezet va zi kement karet,
Rag ar braz dioutañ a zo 'vel pulluhet.
Ar prenestou brevet, an nor ken mizerabl
Ar presiou louedet m'z eo sklaset va gwad.

Al leh am-eus bevet eüruz ha didourmant,
Al leh ma'z on-me bet ken foll ha ken yaouank
A zo bremañ didrouz, ha trist 'vel ar maro.
Red eo din areti³⁶ ha mond krenn en dizro.

Deuz ar speurenn ema, bepred seder ha flamm,
Dindan eur werenn dorret, poltred karet va mamm ;
Gouelet am-eus doureg, klemmet am-eus va gwalh.
Follet eo va spered ha va halon a-walh.

An iliz 'zo karget gand yeot ha gand lener³⁷.
Eun houper 'zo neizet tre war dal an aoter.
Er vered ar beziou a zo el loustoni.

³³ redal : redeg.

³⁴ a zo : ez eus.

³⁵ o vreunial : ?

³⁶ areti : galleg : chom a-zav.

³⁷ lener : ?

Ar mein hag ar hroaziou goloet a ginvî.

Eun alan vilimuz ‘deus c’hwezet war va bro.
Ma ne welan der oll ‘med traou trist ha garo.
Koulskoude ne gredan ‘vefe en Breiz-Izel
Na brezel na trubuil da veza ken kruel.

Va zi, va hêr, va bro, a zo abandonet.
Tud, kerent, mignoned a zo oll partiet,
Rannet eo va halon, ne hellan ket kompren,
Ha mervel a rankan ‘kreiz an deñvalijenn.

Da anaon Théophile Guyomarc'h

Dirazout, mestr ar bed ha salver an den kêz,
Daoulinet, gand gwir doujañs, en arvar hag enkrez,
Reuzeudig, en va daelou karget a hwerventez,
E houlennan ganez kinnig prim d'am mignon
Glahar vraz va halon.

Daou vreur e oam ! ha barzed e oam ivez on-daou.
Unanet dre al le d'ober brezel d'ar gaou.
En karantez or bro, maget gand gwad ar Vamm
A virem glan ha kaer, brud eul lignez divlamm.
Pa vanke din re vuan astenn va hammejou
Eur helenner feal a boueze va homzou.

E galon a oa frank ha digor-braz d'ar mad.
E yalh, heb damanti, riñset d'ar paour, gand stad.
Prest atao da zikour, da rei skoazell d'an oll
Hep soñjal 'nije ket aliez e zigoll.
Speredeg ha gouizieg, evel-se dous ha fur,
Med enebour kaled d'an dud fall ha hudur.

Skubet eo va henvreur, o tizrei deuz va zi !
E varo trist kenañ a ra din hirvoudi.
Ne gollin ket eñvor ! biken ne zisoñjin
Deuz va mignon karet, ken karantezuz din.
Biken deuz va spered ne gerzo ar homzou,
An diweza³⁸ 'gleven o tond deuz e henou.

Gand va fedenn galoneg, kalz kenvroiz a-leiz
A gaso, dre berz Doue, trugarez d'ar barz Breiz.

Pa vleunie ar brud a-nevez
'Tapin eur voundenn euz ar menez.
'Kichenn e vez, e plantin neuze
Kaerra fleurennig an Arre,
Hag an avel flour, iskiz
Da Verrien, e-tal an iliz
A gano da Phil Guyomarc'h
Son vurzuduz an douar.
Hag a-wechou, an êzenn dener
A zougo dezañ kan an *Alhweder*.

Miz Kerzu 1929.

³⁸ An diweza : ar re ziweza

Va hoant ar here kamm

N'eus forz ebed. Despet nan e' ket brao,
Va halon a zouj anezañ...
Kamm eo. Mad-tre ! pegwir e kao
Ar hiz da blijoud din kenañ.
Nann ! n'eo ket brao ha darn all a vouse'hoarz,
Pa dremen e-biou din e jilgamm.
Med e zaoulagad prim a hoarz
Ar sklêrder war e zremm ken flamm.

Va hoant a zo kere. An oll dud vad euz kêr,
E-barz e di, a deu bemdez da barpillad³⁹.
Delhen a ra bepred eur yez splann ha seder,
'Vid gelver an huñvre 'oar geriou deread.
 Kana 'ra soniou ken dudiuz,
 Lod o-deus avi deuz e vouez,
 Pa ziroll, tener hag alanuz,
 Evidon 'n eur grena a-bez.

Ken mad eo. Ne vo morse pinvidig.
Rag pep paour-kêz dezañ a zo kenvreur...
Med daoust da ze, meur a hini birvidig,
'Vid hen sacha, a ra an dro d'e leur !
Er pardoniou, red eo mond d'ar jabadao.
Va mignon kêz n'e' ket evid dañsal,
Rag e harr gamm a vir outañ atao,
Gwella 'n-eus greet, meur a wech o soñjal...

³⁹ barpillad : ? parpillotad.

Da Jean-Julien Lemordant

Ho taoulagad ‘zo serret da sklêrijenn an de’
Mez ar sklêrder ‘n ho kalon a drid en bravente’,
Er gened ken dudiuz bepred e chomo glan.
Yaouankiz ha karantez da viken brao ha splann.

‘Vel kontadenn vurzuduz, ha siwaz trist-kenañ,
Eur hont berr⁴⁰ ha spouronuz am-eus klevet bremañ.
Ha va daelou difronket ‘giz eur stêr deredet,
‘Barz eur rann leun a hloar, levenez ‘n-esu lakaet.

Ha neuze war va daoulin ‘z on kouezet en eul lamm.
Ho sakrifis komprenet pegen braz, pegen flamm.
Ar prof oll disklabezet euz ardou ar bed-ma’,
Skeduz zo ‘n em zisklêriet ‘barz eun noaz ar brava.

Seder an nevez-amzer a gan ‘barz ho kalon,
‘Hnetchas ho torn heb krena war al lien kaled.
Ha me, paour-kêz reuzeudig, meur a wech ‘m-eus klasket
Kas d’an Neñv, ‘vid ho meuli, va zalud dre eur zon.

Peurgas

Eur hleñved a ra din beza gwalldroug ha du ;
Bemdez en em gavan mez morse ne vezan heñvel,
‘Vid ma welo ‘n e warez ar bobl a Vreiz-Izel,
Va Doue, da Lemordant, roit ar gweled dioustu !

⁴⁰ Eur hont berr : eur gontadenn verr.

Neh

Da Loeiza Fléouter, a-greiz-kalon.

A-wechou, pa yud an avel,
va halon a vez trist-kenañ.
Teñval ‘giz ar pehed marvel,
an daerou a veuz anezañ.
Mez desket ‘m-eus trehi va glahar
ha kana kreñv e-leh gouela.
Koach a ran anken ha kounnar
er bed, ne dalv ket deom leñva.
Nann ! ne dalv ket en em ziskuill,
Rag beza zo kalz a dud sod.
Euz ar re fall ‘vez kavet puill,
Stankoh ‘vid bleuniou war ar bed.

Peb den a zoug e zamm - pep hini ‘n-eus e lod.
Ar bed ah a, a zeu, hag an oll draou a ruill.
Ha ma klasket eur wech lakaad an harz d’ar rod,
Ho-po ‘ziwar ho fri – ‘vel eun diskroug – anduill.

A-wechou, pa ziroll em spered,
eñvoriou didruez ha kri’.
E seblant din ez on bet merket
‘vid maga gwall ha kasoni.
Koulskoude zo⁴¹ tommder em halon,
eun tantad flamm med dalhet kloz.
Digarez ‘m-eus hag a beb feson,
d’hen kuzad mad : warnon, malloz !

Feuket am-eus meur a hini,
‘n eur laroud deze ar wirionez.
Darn all ‘deus roet din testeni,
ha bennoz dous o harantez...
Med piou ‘vel-se ‘n-eus va aotreet
da ziframma tud ven ha fall ?
Peb den gand lorh a zo kabestret.
Atao en em gav didamall !

A-wechou, nebeudig a dra,
a ziskenn sklêrijenn warnon.
Bennoz Doue ‘oar diskarga,
levenez vraz en or halon.
Bennoz Doue eo an heol splann,
an evned hen gwarez er hoad.
Sell, birvidig o daoulagad
hag ar garantez en o han !

⁴¹ zo : ez eus.

(Ar re all 'zo en galleg nemetken).